



## Nedeleg



Da Nedeleg, me'lakaio va botoù  
Er siminal bras'korn an oaled.  
Pa vezo mouget ar gouloù  
E teuio fonnus ar profoù.

Me am bezo ur marc'h gell  
Va c'hoar Lizig ur boupinell.  
Ha traoù lipous da sunañ  
Ha kistin rous ga grazañ.

*Rimadelloù a ri!*



## Nedeleg



Da Nedeleg, me'lakaio va botoù  
Er siminal bras'korn an oaled.  
Pa vezo mouget ar gouloù  
E teuio fonnus ar profoù.

Me am bezo ur marc'h gell  
Va c'hoar Lizig ur boupinell.  
Ha traoù lipous da sunañ  
Ha kistin rous ga grazañ.

*Rimadelloù a ri!*



# Noz Nedeleg



Pa erru noz Nedeleg  
Noz du, noz yen, noz aveleg  
Hag an erc'h ouzhpenn o kouezhañ  
Hag ar c'hloc'h o son er chapel  
E tiskenn an Tad Nedeleg  
War e gein karget e vouteg.  
Mont a ra da bep ti.

En o botoù-koat,  
Digoret bras o daoulagad,  
E kav Yannig ha Rozenn  
Leun a draoù kaer  
Dindan ar wezenn!



# Noz Nedeleg



Pa erru noz Nedeleg  
Noz du, noz yen, noz aveleg  
Hag an erc'h ouzhpenn o kouezhañ  
Hag ar c'hloc'h o son er chapel  
E tiskenn an Tad Nedeleg  
War e gein karget e vouteg.  
Mont a ra da bep ti.

En o botoù-koat,  
Digoret bras o daoulagad,  
E kav Yannig ha Rozenn  
Leun a draoù kaer  
Dindan ar wezenn!



# Korriganed Nedeleg



Hastit buan korriganed  
Poent eo sikour an Tad Nedeleg

An hini kentañ a bren c'hoarioù  
An eil a laka ar paper profoù  
An trede hini a ra ar skoulmoù  
Hag ar pevare a skriv anvioù  
Ar penvet hini 'ro ar pakadoù

Korriganed, trugarez vras  
'vit bloaz a zeu, bezit prest c'hoazh !



# Korriganed Nedeleg



Hastit buan korriganed  
Poent eo sikour an Tad Nedeleg

An hini kentañ a bren c'hoarioù  
An eil a laka ar paper profoù  
An trede hini a ra ar skoulmoù  
Hag ar pevare a skriv anvioù  
Ar penvet hini 'ro ar pakadoù

Korriganed, trugarez vras  
'vit bloaz a zeu, bezit prest c'hoazh !



# Da noz Nedeleg

Na da noz Nedeleg  
Piv a chomo dihun?  
Piv a chomo' n e sav  
E-lec'h mont da gousket?

Selaou!  
Peseurt trouz a glevan?  
An avel o sourral ?  
Un oto o c'hornal ?  
N'eo ket !



Du-pod an noz.  
Yen eo, ha hir e vo.  
Ar gouloù - deiz, peur e teuio en dro ?

Na da noz Nedeleg,  
Piv a chomo dihun ?  
Piv a chomo en e - sav  
Evit mont da welet ?  
Hini 'bet!



Hervez Jean-Claude Le Ruyet,  
*Nozvezh an noziganed.*

# Da noz Nedeleg

Na da noz Nedeleg  
Piv a chomo dihun?  
Piv a chomo' n e sav  
E-lec'h mont da gousket?

Selaou!  
Peseurt trouz a glevan?  
An avel o sourral ?  
Un oto o c'hornal ?  
N'eo ket !



Du-pod an noz.  
Yen eo, ha hir e vo.  
Ar gouloù - deiz, peur e teuio en dro ?

Na da noz Nedeleg,  
Piv a chomo dihun ?  
Piv a chomo en e - sav  
Evit mont da welet ?  
Hini 'bet!



Hervez Jean-Claude Le Ruyet,  
*Nozvezh an noziganed.*